

**Ruppe** François (Frañsez Ruppe). Speied 1851 – Speied 1921.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Geriou galleg brezonekaet a zo e-barz, kement ha ma vez red gouzoud galleg evid kompren ervad. Viou-koukoug a zo ivez. Ober a ra gand “pehini” ha “pere” evel an oll skrivagnerien deuz an amzer-ze.

## Chañson nevez

*War sujed glahar ha tristidigez daou zen yaouank, demeurez a barrez Speied, prest da vervel gand ranngalon.*

Tud yaouank deuz ma farrez, didostait, me ho ped,  
Da zelaou ar vuhez a zo ganin erruet :  
Me ‘zo eur serjañ-major, ‘tistrei deuz an armeo’.  
Rejouiset e’ ma halon, oh antreal ‘barz er vro.

Pa oan-me partiet, da gomañs va hoñje,  
‘M-oa laosket war ma lerh objed va harante’,  
‘M-oa laosket war ma lerh fleurenn ar yaouankiz  
Evid mond d’ober eur hampagn, ‘trezeg ar gêr a Bariz.

E-pad pevar bloaz hanter, ez on bet e rejimant.  
Hi ‘deus greet va oll chagrin ha va brasa tourmant.  
Bemnoz ha beb mintin, e-pad an deiz, aliez,  
Va spered a nije beteg ti va mestrez.

Va spered a nije beteg va bro benniget,  
O soñjal a beb momed ‘barz va amzer paseet.  
C’hoarvezoud a ree ganin, e-giz an durzunell :  
Pa vez kollet ganti he far, en em daol da vervel.

Ganin-me, tud yaouank, ‘c’hoarvezo memez tra.  
Glaharet braz e oan, o tond da bartia,  
Rannet e oa va halon, o toned d’he huitaad.  
Hi, pa welas ahanon he-devoa kalonad.

Eiz devez a-raog partial ‘vezem asamblez bemde’,  
Hag eur zulvez d’abardaez, hi a lavaras din-me,  
An daelou ‘n he daoulagad, he mouez antrekoupet :  
« Petra ‘rin-me, den yaouank, pa veh-hu partiet.

Me ‘ya da vond bremañ da ober pinienn,  
Da lakaad liva e du va oll dillajou gwenn  
Evid ober kañv, da ma muia-karet,  
Partiet evid ar Republik, en deizioù tremenet.

Pa veh-hu erru ‘n ho rejimant, me ho ped, va zelvijer,

Da rei din ho kelou, raktal dre eul lizer.  
Me am-eus chagrin braz, gand aon e veh kaset  
En tu all d'ar mor braz, 'giz d'ar vartoloded ».

Ar bloavez mil eiz kant tri-ugent ha daouzeg<sup>1</sup>,  
Da zevez gouel an Nedeleg, e oan-me partiet,  
Da zevez gouel an Nedeleg, da zeg eur deuz an noz,  
Pa oa ma hamaraded all o vond da repoz.

'Oan o vond da di va mestrez, da lared dezi kenavo.  
Hi, pa welas ahanon, a gomañsas gouelo<sup>2</sup>,  
« Arsa 'ta, den yaouank, 'maoh o vond er-mêz ar vro.  
Beuzet ez eo ma halon en eur mor a zaelo' ».

« Kenavo, a laran deoh, kenavo, ma mestrez,  
'Benn ar pevar pe pemp bloaz, ni 'n em gavo assemblez ».  
Hi a vouchas din neuze, 'n he daoulagad an daelo',  
Hag e kouezas d'an douar, kazi 'giz d'eun den maro.

D'an deiz kenta 'r bloaz 'oan erru 'barz ar gêr a Ruel.  
Setu me skrivas eul lizer d'am mestrez fidel ;  
Hi a respontas din, pevar devez goude  
Penaoz e oa klañv, klañv-braz war he gwele.

« Mar ne deut ket d'am hoñsoli, ma zervijer fidel,  
Gand ar chagrin, ar glahar, me 'zo prest da vervel. »  
O ! pebez maleur evid eun den tener da guitaad e vro,  
O weled e vuia-garet, 'barz toull dor ar maro.

Pa ven e faksion, war ar meneziou uhel,  
Ma daoulagad a droe war-zu Breiz-Izel.  
Ma daoulagad a droe war-zu ti ma mestrez,  
Mez ne welent netra, nemed koajou aliez.

Deuz ar mintin e kleven-me eun nombr a lapoused  
Ha mouez ar rosignol, war beg ar wezenn pignet,  
Ar rosignol a laras din dre e vouez melodiuz :  
« Te ah-eus e-barz ar gêr eur vestrez karantezuz.

Eur vestrez leun a hlahar, ha karget a anken,  
Abaoe ez oh partiet, oh ober pinijenn ».  
Neuze e lavaras din, gand eur vouez trioñfant :

---

<sup>1</sup> mil eiz kant tri-ugent ha daouzeg : mil eiz kant daouzeg ha tri-ugent.

<sup>2</sup> gouelo : gouela (evid ar rim).

« Me 'gred ez oh glaharet, koulz hag hi, soudard yaouank.

War da<sup>3</sup> dal ez eo merket, gand liou an dristidigez  
Penaoz ez oh ankeniet, o kuitaad da vestrez ».  
Neuze e tiskennas d'an traoñ da vodig, da vodig,  
Hag e teuas war ma skoaz, da gana ar muzik.

An eostik a laras din, gand e vouez trioñfant :  
« Me a vezo fidel deoh keit ma veh 'n ho rejimant » ;  
« Arsa eta, evnig bihan, mar veh din ken fidel,  
E yeloh evidon, da veteg Breiz-Izel.  
'Benn arhoaz mintin, kerkent 'vel ma vo sklêr,  
Te a deuiio d'am hamp, da gerhed eul lizer ».  
Hanternoz mintin<sup>4</sup>, ne oa ket sklêr an de'  
Me 'glevas ma mesajer ; war ma frenest o kane<sup>5</sup>.

Lavared a ree din neuze dre e ganaouenn :  
« Roit din ar paper, ma partiin souden ».  
« Kerz eta, eostik bihan, da ziuouaskell digoret<sup>6</sup>,  
Ha kemerit an hent da voned da Speied.

'N eur errui 'barz ar vro, te 'h ey da di ma mestrez,  
Hag a gomañso kana e-kichenn he frenest ;  
Te a lavaro dezi penaoz 'veh degaset  
Deuz ar gêr a Bariz, gand he muia-karet ».

D'an eur an hanternoz, 'erruas an eostik  
Da houl hen digor digand ma mestrezig :  
« Plah yaouank, emezañ, digorit din an nor,  
Me 'zo degaset amañ, gand ma serjañ-major.

An den yaouank-se, hervez am-eus klevet,  
A zo choazet gand Doue, 'vid beza da bried.  
Setu amañ eul lizer e-neus roet din-me,  
Me 'ya da bartial bremañ, da gonta dezañ ho toare. »

Ar bloavez mil eiz-kant tri-ugent ha c'hwezeg,  
Ministr ar brezel en-devoa desidet,  
Ministr ar brezel en-devoa desidet,  
E veze bet liberet toud ar bloavez unneg.

Da ma mestrez raktal, me skrivas eul lizer  
Evid annoñs dezi e oan erru d'ar gêr.

---

<sup>3</sup> da : kemmeska a ra "te" ha "c'hwî".

<sup>4</sup> Hanternoz mintin : ?

<sup>5</sup> kane : kana (evid ar rim).

<sup>6</sup> digoret : digorit, pe digor.

« Arsa eta, plah yaouank, a lavaren dezi,  
Kemerit da joausted ha kuitait da ennui<sup>7</sup>.

D'an degved a viz Du, e oan-me partiet  
Deuz ar gêr a Bariz 'vid va bro benniget.  
Neuze e teuas soñj din demeuz ma mestrez  
Evid eun den yaouank, pebez plijadurez

'N eur errui 'barz ar vro ez on eet d'he gweled,  
'N eur antreal 'barz an ti, dezi 'oan neuze adreset :  
« Boñjour deoh, ma mestrez, setu-me 'barz ar vro,  
Erru on gand joausted, da lakaad fin d'ho kañvo'.

Lakit bremañ e ruz an dillajou p'oa greet  
Lakaad liva e du, pa oan-me partiet.  
Lakit bremañ ho torn n' hini ho servijer,  
Ma vezim uniset ar rest deuz on amzer.

Setu amañ eur zeizenn, evid fin deuz or yaouankiz,  
Am-eus degaset deoh, deuz ar gêr a Bariz.  
Konservit anezi, gand ho kwalenn arhant,  
Ken a yefem on-daou ouz taol ar zakramant. »

« François kêz, va zervijer, eme ar plah, neuze,  
Na 'mom<sup>8</sup> ket ar boneur d'errui 'barz ar poent-se,  
Or herent o-deus cheñchet abaoe 'z oh partiet,  
Ni eo an daou valeürusa 'zo gand Doue krouet. »

« Ma mestrez ! ma mestrez ! n'am diskonsolit ket,  
Kar me am-eus eur galon a zo tener-meurbed.  
Me 'zo eun den yaouank 'tistrei deuz an armeiou,  
Am-eus souffret dija nomb braz a dourmañchou.

Mez e-barz va oll chagrin me en em gonsole,  
Pa deue soñj din ahanoh, va dous, va harante',  
Ha bremañ, va mestrez, ma vezom separet,  
Gand eur barrad avel, me a vo diskaret.

Ha posubl e ve eta, em-efem<sup>9</sup> meritet  
Deuz a-berz or herent, eun dra ker kriz-meurbed.

---

<sup>7</sup> ennui : enoe.

<sup>8</sup>Na 'mom ket : n'on-eus ket

<sup>9</sup> em-efem : or-befe.

Deus ganin-me d'an iliz, bezom on-daou fidel,  
Yam<sup>10</sup> d'ober on fromesa, dirag an Aviel.

Neuze ni bedo Doue, hag e Vamm venniget,  
Da rei da doud or herent sklêrijenn war ar sujed  
Demeuz ar bromesa a 'mom-ni<sup>11</sup> on-daou greet  
Da vevi asamblez, keit ha vim war ar bed. »

« Arsa eta, den yaouank, me 'gemer eul lodenn  
Demeuz hoh oll chagrin, ha demeuz hoh anken.  
Bremañ 'welan ervad, demeuz ho propojo',  
Evid or separi, n'eus nemed ar maro.

It bremañ d'ar gêr, ha me 'ya ive',  
Hag informom on zud, deuz bolontez Doue.  
Ha 'benn disul d'abardaez, d'an eur goude kreisteiz,  
Ni en-em gavo asamblez da gonti on doare.

Ni 'n em gavo asamblez 'leh a-mom goulennet  
Sklêrijenn digand Doue, hag e Vamm venniget.  
Larom bremañ eur *Bater* 'raog 'n em zispartia.  
Kenavo 'ta, ma mestrez, ken vo disul kenta. »

### **An den youank oh errui 'barz ti e dud**

« Arsa eta, va zad kêz, selaouit va fedenn.  
Me 'ya d'esplika deoh bremañ va flanedenn.  
Me 'ya da lavared deoh ar pezh 'zo erruet,  
Hag ar pezh a bouez bemdez war va spered.

C'hweh vloaz 'zo tremenet abaoe pardon ar Hrann,  
'Oa gounezet va halon gand eur plahig yaouank.  
Gand he hamaradezed 'm-oa gwelet anezi.  
Chalmet 'doa va halon, gounezet e oa ganti.

An eil gwech ma he gwelis 'oa 'barz iliz Sant-Per,  
Daoulinet e-barz ar heur, vis-à-vis d'an aoter.  
Eno pa 'm-oa he gwelet neuze am-oa soñjet  
Penaos e oa eun êlez deuz an neñv diskennet.

Pa oa echu an overenn, 'oan deut 'mêz an iliz  
D'he gortoz 'barz ar vered, goude fin an ofis.  
Pa oa o sortial er-mêz deuz ar porched,  
Me 'zirijas ma fazou 'vid moned d'he haved.

---

<sup>10</sup> Yam : eom.

<sup>11</sup> a 'mom-ni : on-eus-ni.

« Boñjour deoh, plahig yaouank, rouanez an douar ;  
E-barz ar Finister ne welfen ket ho par.  
Gounezet eo ma halon ganeoh, plahig yaouank,  
Lavarit din, me ho ped, bremañ ho santimant. »

« C’hwi ez eo, den yaouank, an hini a garan.  
N’eus nemedoh d’am lakaad eüruz ‘barz er bed-mañ.  
Ma halonig a oa ganeoh gounezet  
Abaoe ar henta gwech ‘m-oa ganeoh parlantet. »

« Mar vezim separet, me ‘vo ar maleürusa  
A zo bet gand Doue krouet ‘barz ar bed-mañ.  
Rag se, eta, on zud kêz, dezignom an devez  
‘Vid ma errufom toud da barlant asamblez.  
C’hoant braz a-mom on-daou da veza priejo’,  
Evid galloud ‘n em garoud, tre beteg ar maro.

### **Respont d’an daou zen yaouank**

« Arsa ‘ta, daou zen yaouank, ni-on-deus ho maget  
Hag evid dimezi or hoñje n’ho-po ket.  
Ni ne gredim birviken ‘z oh galvet gand Doue,  
Kar n’e-neus evidoh, a-walh a fidelite. »

### **An daou zen yaouank d’o herent**

« ‘Benn disul kenta, e-pad an overenn,  
E-giz deom-ni on-daou, goulennit sklêrijenn  
E-war<sup>12</sup> ar garantez a zo ‘n or halon,  
Hag ho-pezo respont deuz on afeksion.

Na deut ket da gontraria diou garantez parfet,  
Pere<sup>13</sup> ‘varvo gand glahar mar vint dispartiet.  
Ni a deu d’ho pedi da rei deom ho koñje,  
Ma vezo greet er bed-mañ ‘r pez ‘zo lakeet gand Doue. »

### **Respont d’an daou zen yaouank**

« Inutil ez eo deoh, iñsisti davañtach.  
Unan ahanoh ‘h ey da gouent, an hini all da skolaj.  
N’oh ket galvet gand Doue da veza uniset.  
Rag-se eta, daou zen yaouank, rag-se ‘n em zeparet<sup>14</sup>. »

---

<sup>12</sup> E-war : diwar-benn ( ?)

<sup>13</sup> Pere : fazi bet greet gand an oll skrivagnerien deuz an amzer-ze.

<sup>14</sup> ‘n em zeparet : ‘n em zeparit.

### **An den yaouank d'e gerent**

« Arsa eta, va oll gerent, me 'ya da lavared :  
Ranna a rit va halon, troubli 'rit ma spered.  
Me 'ya da lavared deoh, kenavo ! kenavo !  
Warhoaz pa darzo an deiz, me a vezo maro !!!

### **An den yaouank 'rankontras e vestrez**

D'an eur goude kreisteiz, me 'gavas va mestrez,  
Hag hi glaharet braz ha leun a dristidigez.  
« Aotrou Doue, den yaouank, O ! pebez planedenn,  
Rannet ez eo ma halon, siwaz, gand an anken.  
O ! kerent valeüruz, c'hwi ho-pe ar galon  
Da lezel daou zen yaouank da vervel gand ranngalon.

### **An daou zen yaouank d'o herent**

« Preparit ho tillad kañv, a-benn arhoaz vintin  
Ni a vo kavet maro dindan ar wezenn ivin  
A zo 'kichenn an iliz, e kornig ar vered  
Ha dindan pehini<sup>15</sup>, ni a vo interes.  
Lakit ahanom, me ho ped, dindan ar memez bez<sup>16</sup>  
Evid ma vefom asamblez, 'hed an eternite ! Amen !!! »

François RUPPE

---

<sup>15</sup> pehini : evel "pere" uhelloh.

<sup>16</sup> dindan ar memez bez : "bez", "be" er skrid-orin. E-barz ar memez bez.

## Chañson nevez

*War sujed ar goñskrived yaouank demeuz ar bloavez mil eiz kant unneg ha tri-ugent*

*Domine potentissime da luminem mihi*<sup>17</sup>

Me ho ped 'ta, va Doue, dond d'am sklêrijenni  
Evid ma hallin disklêria va buhez tremenet  
Hag ar poaniou da bere, siwaz, ez on sujed.

Digorit ho tioukouarn, selaouit eun den yaouank  
Pehini 'n-eus kuitaet e vro, ar bloavez-mañ prezant,  
Ar bloavez mil eiz-kant daouzeg ha tri-ugent,  
D'ar bemp warn-ugent a viz Kerzu, 'vid rei deoh da gompren.

An deiz-se deuz ar mintin, 'oa deut an ordrenañs  
Da bartial d'an dregont, evid ar Republik Frañs.  
Setu ar goñskrived yaouank, oll 'oa glaharet,  
O kleved ar helou-ze, o halon 'oa rannet.

Oblijet da guitaad, o herent, o mignoned,  
O zadou, o mammou, o breudeur, o c'hoarezed.  
War ma feillenn 'oa merket ar homzou kriz ha kruel :  
« Puniset e veh, mar vankit d'an appel ».

O weled ar homzou-ze, va halon 'oa rannet.  
An dour a zirede demeuz va daoulagad<sup>18</sup>.  
Setu-me partiet, d'an dregont deuz ar miz.  
Hirio 'maon e Mont Valérien, 'uz d'ar<sup>19</sup> gêr a Bariz.

N'on ket amañ va-unan, o souffri tourmañchou.  
Pevar all a zo c'hoaz, pere 'zo deuz ma bro.  
War sujed da bere 'm-eus c'hoant da parlanta  
Kar pevar soudard ez int, demeuz ar vaillanta.

Bemnoz en em réünisom, a-raog mond da gousked.  
Or halon 'ra 'med unan, pa vem réüniset ;  
Neuze e parlantom deuz ar plijadurezou  
A 'mizem<sup>20</sup> e-barz ar gêr, gand or hamaradou.

Pa yejom da bourmen, 'teue kaoz deuz ar vro.  
Gand daelou on daoulagad e hlebiem an hentcho'.  
Evel eun durzunell gêz, kollet ganti he far

---

<sup>17</sup> *Domine potentissime da luminem mihi* : Aotrou gallouduz-meurbed, ro goulou din.

<sup>18</sup> va daoulagad : "va daoulaged" er skrid orin, evid ar rim.

<sup>19</sup> 'uz d'ar : skrivet "ust ar", an distagadur reiz.

<sup>20</sup> A 'mizem : or-beze.



Pehini 'n em daol da vervel raktal war an douar.

Pa zoñjan em zad, em mamm, pere 'deus va maget,  
Hag e-barz an ti eüruz leh ma'z on bet ganet,  
Neuze e ven<sup>21</sup> skoet a ziskoñsolasion  
Hag e-giz eun taol lañs a dreuz din ma halon.

Pa deu e-barz va memor an amzer 'm-eus paseet  
Gand ma hamaraded ha ma hamaradezed  
Deuz pere allaz !!! allaz !!! ez on separet hirio,  
Peleh ez eo eta ar plijadurezo'

'Meum<sup>22</sup> tañvaet asamblez, koulz an noz hag an deiz ;  
Setu ar pezh a base dre va spered, bemdeiz ;  
Ma mestrez, ma mestrez, amañ war ma chañson,  
Me en em rekomand deoh, deuz a-greiz va halon.

Soñjit 'barz an hini ho kar, pehini 'zo en arme  
Prest da vond en dizesper, o hortoz e goñje.  
Bremañ zo pevar bloaz e oan en ho kichenn,  
Hag an deiz a hirio 'maon war lein eun duchenn.

War lein eur menez, fas d'ar seiz sort amzer,  
'Uz d'ar gêr gapital Frañs, 'maon o soufr mizer.  
Diwar lein an duchenn-mañ 'taolan 'wechou ma zellou  
War-zu ma bro natal, mez netra ne welan<sup>23</sup>

Nemed ar firmamant pehini 'zo 'uz or penn,  
Hag an heol santel 'ra deom ar sklêrijenn.  
Deuz an noz e welom c'hoaz al loar hag ar stered  
Pere 'kontaplom bemnoz, a-raog mond da gousked,

Demeuz sklêrijenn pere pa oan e-barz ar vro  
A brofiten 'vid moned d'ober pourmenadennoù.  
Setu aze souvenirioù a zo kriz ha kruel ;  
Bet<sup>24</sup> truez ouz ho pugale, tadou, mammou santel.

Kerent ha mignoned, ne ouifeh ket kompren  
Ar mizerioù a zoufrou amañ war an duchenn.  
D'ar poanioù ar brasa ez eur sujed bemdeiz,  
Oblijet d'ober faksion, koulz an noz 'vel an deiz.

Gand ar zah war o chouk, o fuzul, o zabrenn,

---

<sup>21</sup> e ven : e vezan.

<sup>22</sup> 'Meum : on-eus

<sup>23</sup> ne welan : n'eus rim eneb.

<sup>24</sup> Bet : bezit

Hag evid 'n em repozi n'eus nemed eur plankenn.  
Hennez a zo eur gwele a zo yen ha kaled  
Evid repozi eur horv paour pehini 'zo skornet.

O tond deuz ober faksion, dre ar glao pe an avel  
A glever, e-pad an noz, dre ho tiouskouarn o yudel<sup>25</sup>.  
Mar vize<sup>26</sup> lavaret din, bremañ zo daou-ugent miz,  
'Vizen bet ken maleüruz o tremen va yaouankiz.

Ma 'mize pedet Doue, da dorri va flanedenn !  
Mez pa'z eo degouezet ganin, ez eo red din he dougen  
Hag e-barz fin va hoñje marteze 'vo brezel.  
Neuze 'n eur vro estrañjour, marteze 'vo red mervel.  
Soñjit 'ta, tud yaouank, pegen trist 've ar maro.  
Mervel da bemp bloaz warn-ugent, e-kreiz tan ar hanoniou.

Mar ya ar helou d'ar gêr da lared 'vin maro,  
Lakit ganin, me ho ped, eun nebeud pedenno',  
Ha neuze e-barz ar vro, evel ema ar hiz,  
'Houlan ganeoh eur *Bater*, pe eun *De profundis* !

Mond a ran, va mignoned, bremañ da echui.  
Re hlaharet eo va halon 'vid galloud kontinui.  
Mez ken evid finisa, 'm-eus c'hoant da lavared  
Ano ar pevar den yaouank, deuz pere 'm-eus parlantet.

Unan a zo e ano, Jacques Bourriquen.  
An eil demeurez ane, ez eo Even Gourlaouen.  
Izidor Maisonneuve, ha Corentin Lagadec,  
An hini diweza 'zo deuz Karaez, an tri all deuz Speied.

Mar 'maoh klask goud ha kleved, piou 'n-eus greet ar chañson ;  
'Ma 'barz ar gêr a Bariz, rannet ez eo e galon,  
Serjañ-major ez eo, demeurez ar bloavez unneg.  
E ano 'zo François Ruppe, demeurez bourk Speied.

Bremañ ar pemp asamblez, or spered 'barz ar vro,  
E larom d'ar Finister, *kenavo !! kenavo !!!*

---

<sup>25</sup> yudel : yudal (evid ar rim).

<sup>26</sup> vize : vije.

